



Kân bale an dud yaouank

WAR DON SEZIZ GWENGAMP : *Porzer digoret an nor-man.*



Ni, mibien feal Breiz vihan,
Eus a greiz hon c'halon a gân :

DISKAN

*Breman, bepred, 'n despet da Gomb,
Bretoned, Kristenien 'vefomp (1).*

Diou greden hon euz ha diou fe :
Doue da gentan, Breiz goude ! (2)

Diou fe hon euz ha diou greden,
Ha ni war zav 'vit o difen.

Ni fell d'imp e vije miret
Doue da Vreiz, Breiz d'ar Varzed (3).

Gwir heritourien Breiz-Izel,
Stourmomp eta betek mervel.

Ma lamm 'n hon c'hreiz kalon Arvor,
Demp eta, savomp hec'h enor.

Ni rey gant hon divrec'h skoulmet
Eur gouriz dir d'hon Bro garet.

Gant hon gwad ni a walc'ho d'ei
Herminik gwenn he mantel zeï.

Paotred Arvor, kalonou ter,
Kerzomp diskwiz ha kanomp skler :

*Breman, bepred, 'n despet da Gomb,
Bretoned, Kristenien 'vefomp.*

(1) Pe : *Breman, bepred, 'n despet d'ar Gall,
Ni 'vo Bretoned 'vel gwechall.*

(2) Pe : Diou greden hon euz ha diou feiz :
Doue da genta ha, goude, Breiz !

(3) Pe : Doue da Vreiz ha Breiz d'ar Varzed.